

GUERZ NEVEZ,

VOAR SUJET EUN DEN CHARITABL.

Voar ton : *Santez Barba.*

Canomp assembles gant an *Ælez*,
D'a Voerc'hes eur c'hantic nevez
Evit bean mam d'hon Zalver
Hac eur sicour bras d'ar pec'her.

Goerc'hes Vari templ an Dreindet,
C'houi a verit bean meulet,
Abalamour d'ar garante
O c'heus evit hon ine.

Er villagen deus Moutier,
Tost da Escopti Sant-Omer,
So eun den charitabl meurbet.
En andret ar beorien ezommek.

An den man en defoa doujanç Doue,
En andret ar beorien carante,
Hac a roe an aluzon
D'ar beorien a greis he galon.

Meur a gweach e he bet goëlet
Voar an binchou ma tremenet
Ar beorien ar pelerinet;
Evit ho c'has gantan da gousket.

An nôz n'e vije quet lojet,
En n'e dy paour abet,
E cōmmanse neuse da voëlan,
Da lavaret e vije facht Doue outan.

Eun devez a voa ho koanian,
Oll dud e dy assemblez gantan,
O c'hariout ar Voerc'hes,
Guisquet en guis d'eur baoures.

Voar e brec'h voa eur buguel
A voa quen caër hac eun *Æl*,
Deut da c'houlen en n'an Doue
Lojan a nezi evit an nôz-se.

En n'an Doue ma den mad,
M'a repuet n'eun tu bennag,
Hac e ve en ho marchossi a ve,
E kousko ma buguel ha me.

Ar paisan vel m'an klevas,
En e dorn ractal e grogas,
Antreët en ty, lojet e vefet,
Assembles gant ma zud e koainfet.

Pa voaint eus an dol azeet,
Ar buguel e n'eus quemeret,
Hac en laquas voar e varlen,
Da dafan lod demeus e souben.

N'e squis quet ous en cherissan,
N'e baoues da poquet dezan,
Hac hep ma songe an den se;
A voa ar buguel gouir vab Doue.

Pa defeus ho c'hoaniou debet,
En e c'hichen e c'he bet azeet,
A gant cals a humilite
E c'houlennas outin neuse.

A belec'h e c'hoc'h hac a beseurt canton,
C'houi a seblant bean eur vreg a feçon,
C'hervoc ho feçon e seblant din,
O c'heus cals demeus a anvoui.

Me so natif deus an Nazareth,
Deus a ligne nobl hon bet ganet,
An noplan tud a zo er bed,
Mari Joachim hon c'havet.

A so deut er vrô-man da bedin,
Eun den so mignon din,
Da jouissan deus eun heritach,
Eur recompanç hac a vo bras.

En recompanç d'e oll euvro,
Hac ive d'e chariteou,
Abars eiz de, gant graç Doue,
A jouissas eus an heritach se.

Ar paisan na intent quet
Ar pes e deveus lavaret,
A couscoude ar c'homso se,
So avantachus d'e ine.

Chanch a ra a gomso ar paisan,
Goulen a ra outin humblamant,
Hac e so en ho pro quement a viser
Vel so aman en hon c'hartier.

Petra bennac ma c'he Doue coleret
En andret ar bec'herien obstinet,
Na neus nemet ar leodouet
Bep sort blasphemo miliguët.

Mar carsem quitted hon pèc'hejou
Hac hon guél inclinationou,
Doue a bromet amzer favorabl,
Hac ar c'honvers a vezou mad.

A bars tri bloaz Doue a bromet
E vezou abondanç deus a ed,
Pis ha faou hac a bep tra,
Ar pes so necesser evit beva.

Ma guemerit ma c'homso,
Evit guevier na fablennou,
Ar pes a lavar an so gouirione
Sortiet eus a c'henou Doue.

Pa deveus e c'homsou achuet,
E c'habillamant so bet chanchet,
Ed c'he quen caër hac ar cristal,
An heoul ar steret hac ar loar,

Ar Mabic Jesus a neus roet,
E venediction d'an assistant
Ha da guement ha voa present,
Ma sortichont en eun instant.

Eur sclerigen a disquennas
Ha us d'an ty gant sclerder vras,
Ila c'hint ho sonjal neuse
Voa ar buguel guir vab Doue.



Ar paizan pa voel quement man,
Gant joa a gomanç da voelan,
Ho voelet en defoa bet ar bonher
Da lojan en e dy hon Zalver.

Bras e c'he sur han humilite,
Deus a Jesus gouir vab Doue,
Hac he vam ar Voerc'hes Vari,
Da vezan deut da lojan d'am zy.

Abars eiz devez d'ar goude,
E c'ha ar paizan clanv d'e voële,
Ma lavar d'e vreg d'e vugaligou,
E voa scoët gant ar marou.

An nôz quen evit ma varvoas,
Da eiz eur deus an nôs e coue clanvas,
Pa glév ar beorien e voa maro,
Na baouesent da scuil daëro.

Quent evit ma voa decedet,
E lavar d'e vugale ha d'e briet,
Quafet sonch demeus ar beorien,
Na diminuio quet ho moyen.

Chetu aman ar recompanç,
A n'eus an den man en assuranç,
Goude e ben e chariteou,
E m'an gant Jesus-Christ en évou.

